

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù - Dañs round

**E Kerlouan e-tal an Dred**

E Kerlouan e-tal an Dred ( 2x)  
Teir batimant karget a ed, Marivon Madelon  
Abred diouzh oh Marion belle Madelon

Teir batimant karget a ed ( 2x)  
Teir dimezell deuet da welet, Marivon Madelon  
Abred diouzh oh Marion belle Madelon

Teir dimezell deuet da welet  
M'emañ ar pouezder diouzh an ed, Marivon Madelon  
Abred diouzh oh Marion belle Madelon

M'emañ ar pouezder diouzh an ed  
Ar c'habiten 'zo o kousket

Ar c'habiten 'zo o kousket  
Bremaik e teuio d'ho kwelet [d'hor gwelet]

Bremaik e teuio d'ho kwelet [d'hor gwelet]  
Ur pok pe zaou 'n eus goulennet

Ur pok pe zaou 'n eus goulennet  
Ur pok pe zaou me ne roin ket

Ur pok pe zaou me ne roin ket  
Gant aon na vez tud o sellet

Gant aon na vez tud o sellet  
Met tud o sellet n'ez eus ket

Met tud o sellet n'ez eus ket  
Nemet al loar hag ar stered

Nemet al loar hag ar stered  
Hag ar re-se ne wellont ket

Ha war e benn oa 'n em doalet er mor  
Gant ar c'hranked oa bet debret

Gant ar c'hranked oa bet debret  
Hag e bro Saoz oa bet kavet.